


Meurriad

#40


BANNOÙ-TRESE
HA C'HOARIOÙ!



• NICOPY • BALAN • PHIL • MORINIERE/CHOUIN/TAREK • MAREK
LOL • AURELIEN.H • MORVAN • SANGLA • LE DORVEN

NE VERN AN NIVER A GILOMETRADOÙ,
RET E VO KONTAÑ GANT AR BLIJADUR.

ESPACE, AR REFERAÑS.



Nicoby



GARAGE SAINT-ROCH

HENT BREST 29830 GWITALMEZE - PGZ : 02 98 48 15 48 - PLR : 02 98 48 12 93



Laerel eo bet ur c'harr-samm leun a argant ganti Metsello Yaro en deus kemeret plas unan eus al laeron.





Yaro. Nag ur souezhadenn.
Atav en em gavomp pa n'emaon ket
o c'hortoz, na tost.

An archerien, boss !



Ur c'harrig-samm... evel an hini omp bet
kelaouet diwar e benn, kent,
dre bellgomz.



Hanter-dro
e ra, komiser.



BANG



PAN




BAM
BAM



Skoazell ! Hent departamant 29,
nepell ouzh Kastell-Nevez. Masklet
eo an den. Ne c'hell
ket tec hout.



Kemer ar wenodenn-mañ !




BANG
BAM

Da bep hini da ziwall
d'e lîr. Emgav warc'hoazh,
e-lec'h ma ouzit



PAM




En em zaskor,
Metsello !



E-pad pegeit c'hoazh,
emaout e soñj ispriziañ
ac'hanon, mechiek ?




HE



KOMZOU YAOUANK

LAURENT JUDOKA



Laurent, abaoe pegeit e rit judo?

Kroget em eus gant ar sport-se pa oan 8 vloaz, 19 bloaz 'zo, hag em eus kendalc'het betek-henn. E penn kentañ e oa 2 c'hourdonadeg ar sizhun, ha bremañ em eus 3. Ar gouriz du 'm eus bet da 16 vloaz.

Penaos oc'h eus en em lakaet da bleustrin gant ar sport-se?

Pa oa yaouankoc'h he doa kroget ma mamm gant ar judo ha kendalc'het betek ar gouriz glas. Diwezhatoc'h, dre ma oan ur bugel dirollet a-walc'h, he deus soñjet e vefe mat din pleustrin gant ar sport-se ivez. Teir c'hentel digoust a zo profet evit anavezout un tammig ar judo. Setu, ur wech kroget, n'em eus ket gelllet paouez, ha bremañ 'm eus ezhomm en em gavout war an "tatami" (al leurenn da bleustrin

judo) alies a-walc'h evit dispign energiezh en ur gemer plijadur.

Ur sport taer eo ? Dav eo bezañ drouk evit hen ober?

N'eo ket unan taer, diaes eo kentoc'h. 5 bloaz a zo ezhomm, d'an nebeutañ, evit dont a-benn d'hen ober en un doare mat. N'eus ket ezhomm bezañ drouk. Hervez an dud eo. Evit ar c'henstrivadegoù em eus ezhomm bezañ e peoc'h ganin evit mestroniañ va c'horf eus ar gwellañ posupl a-benn merañ an anken hag ar stress.

Da vare ar c'hourdoniñ e vez kalz muioc'h a blijadur eget a feulster. C'hoarvez a ra a-wechoù, gant an dud ne c'hellont ket merañ o santimantoù, kaout emzalc'hioù fall met ne vez ket gwelet alies. Er judo ne vez ket skoet gant an dud, n'eo ket

evel ar c'h-Karate pe ar c'h-Kung-fu. Ar pal a zo lakaat an enebour da gouezhañ war al leur en ur implij ar c'horf (an divrech, an divesker hag ar c'hempouez) hag ar skiant-prenet.

Perak ar judo kentoc'h eget ar gouren ?

N'em eus ket bet tro d'ober gouren. Plijet e vefen da glask un deiz bennak.

Petra en deus degaset ar judo en ho puhez pemdeziet?

Da gentañ, pa oan er skol hag er skolaj, e oan un bugel feuls hag e oan boas d'en em gannañ gant ma c'hamaladed. Energiezh e-leizh am boa. Setu ar judo en deus degaset din ar skiant da verañ ar santimantoù fall ha da implij va spered en un doare mat, ha ket en ur zispign an energiezh-se en un doare positif.

(...) ar judo en deus degaset din ar skiant da verañ ar santimantoù fall.

Ul labour war ar c'hempouez a zo d'ober e judo. Setu ez eo un dra vat evit ur bern traoù all, sportoù all da skouer. Kreñvaat a ra ar c'higennoù ivez. Un dra pouezus a c'hell bezañ kavet gant ar judo eo an doare da gouezhañ war al leur hep en em c'hloazañ. Araok deskiñ da lakaat ar re all da gouezhañ e vez desket penaos hen ober ni hon-unan. Talvoudus eo er vuhez pemdeziet rak ne ouezomp ket petra a c'hell choarvezout.

Ur familh vras eo ar c'h'club e-lerc'h ma c'hourdonit?

N'ouzon ket hag-eñ e c'hellomp komz eus ur "familh" peogwir e vez cheñchamantoù bras alies a-walc'h. Kelennerien o vont da grouiñ o c'h'club dezho o-unan, tud o vont kuit da bleustrin e lec'h all, ar re yaouank a za kuit da studiañ e kêrioù all. Ha tud all, nevez-deuet, o tont da zeskiñ pe da c'hourdoniñ en va c'h'club.

En un tu all, e c'hellan lâret eo plijus an aergelc'h. Al labour war ar c'horf a c'hell bezañ ken diaes a-wechoù m'hon eus ezhomm bezañ tost ouzh an holl. Ar re goshañ a zo evel ar "peul" e-keñver gouziegezh ha skiant-prenet ar c'h'club. Resped a zo da gaout an eil ouzh egile.

Piv eo ho mestr war dachenn ar judo?

An aotrou Urvoy an hini eo. Da gentañ e oa an tad, degouezhet e Brest e-kerzh ar bloaz-hioù 50 evit krouiñ


an "Dojo Brestois". Abaoe 3 bloaz en deus kemeret e vab e blas evit kelenn d'ar re vrasañ. Bremañ eo an tad a ra war-dro ar vugale hag an dud nevez o kregiñ gant ar judo (gourizioù gwenn).

Betek pelec'h emaoch e soñj mont gant ar judo?

Un diforc'h a zo etre va c'hoantoù hag ar pezh a c'hellan ober e-keñver an dazont gant ar judo. Mont a rin betek ar pellañ ma c'hellin, hervez va c'horf ha va buhez pemdeziet. Ne gredan ket e c'hellin bezañ ur c'hampion bras, ma fal a zo mont betek kampionad Bro-Chall, zoken ma ne c'hounezan ket, met kaout un plas mat evit hini Breizh. Ha perak ket, bezañ kelenner un deiz bennak. Met n'on ket sur c'hoazh, ur vicher hag a blij din em eus d'ja, gant an ur-zhiataerzh. Gwelout a rin, gant an amzer, peseurt hent a vo an hini dedennusañ.

Peseurt ali a rofec'h d'ar re a grog gant ar sport-se?

Evit ar vugale n'eo ket ur gudenn, rak kavet e vez diouzhtu mignoned, hag an dachenn judo (tatami) a zo ur plas evit fiñval ar c'horf a bep seurt doare. Evit ar grennarded eo un afer all. Kalon vat ! Diaes e c'hell bezañ. An disoc'h a zo atav gwelloc'h eget ar pezh a c'hortozomp. Hag evit an dud deuet, e vez klasket gant ar judo un doare da gavout ar peoc'h diabarzh ha da wellaat ar yeched.



ANV HUNAÛT ANV-BIHAN LAURENT DAD 27 VLOAZ UL LIV AR GWENN HAG AN DU UR VRO BRO THAILAND UR VLEUNIENN AR ROZENN WENN UR SPORT, ESTREGET AR JUDO KORFEMBREGEREZH (GYM) UL LEVR LES FOURMIS GANT BERNARD WERBER UN AKTOUR BENOIT MAGIMEL ("LA VIE EST UN LONG FLEUVE TRANQUILLE, LES RIVIERES POURPRES 2, DÉJÀ MORT") AN MIZ EUS AR BLOAZ MIZ EAST UR MEUZ TAJIN YAR, SIWAZH ER MARE-MAN N'EM EUS KET TRO KEMAR SONEREZH STING PE YANNICK NOAH

Embarnit ho sonj Pellgargañ mp3

War ar Rouedad e kaver filmoù ha sonerezh da bellgargañ. Koulskoude, paeñ a ranker ober. laeron a vez graet eus ar re a ra diaotre... Ha c'hwil, petra soñjit ?

Darvoud eo ar pellgargañ oit un arson bihan. Mat e vefe, memestra, adreñ di bellgargañ trasiñ debar-mus. setu muzulian ar gwriz da bellgargañ a vefe div ober.

Ella, 15 vloaz

Re aes eo pellgargañ. Bez e c'heller pellgargañ meuzennoù da bellgargañ filmoù pe kerdougennoù Kinnigez e vez deomp adfari evit hen ober. Seu ardebet bezin souezhet mat vez graet da c'houde.

Maris, 14 vloaz

Liret e vez e "bachomp" ar ganevien pa bellgargaomp mat neo ket gwir rak pa brenomp pladennoù ez a ar arc'hant d'an tenn-sambann ha neo ket d'ar ganevien. Gwehpenn-se ez eus c'hoazh ketañ a dud a gero kentoc'h prenañ pladennoù rak traoù zo war ar pladennoù ha ne c'heller ket pellgargañ.

Nolwenn, 14 vloaz

Pellgargañ a zo un doare digoust hag efedus war ar memes tra. Pellgarget e vez muoc'h a sonerezh eget a filmoù evit ar poent. Ha direzh eo etekirer ar ganevien hag ar sonerien. Kall a reont arc'hant hag abalamour d'an dra-se e teu diaesoc'h-diaesañ d'ur c'haner yaouank bevañ eus e frouezh e labour.

Renan, 14 vloaz

Pellgargañ a zo un dra vat ardebet abalamour ma vez c'hoazh a sonerezh ha ne vez ket kavet da bremañ war ar marc'heul.

Emilie, 15 vloaz

Liret eo pellgargañ e-keit ha ma teir'ez ar c'hoazh war da bledenn garet. Pañ e vez reet dit an holl debar-mus hag an holl debar evit egerañ ar pezh "pezh d'adur". Se 'zo evit ar d'arson-ha a d'hell mont betek eta ketañ pella, e Breizh, a'zo reet e-keit e-keit, ma d'heller mont d'an tenn-se.

Vivien, 14 vloaz

Da betra 'servij' gwerzhañ lennerien MP3 ma ne c'heller ket pellgargañ ? Ne gomprenan ket pevak eo difennet pellgargañ sonerezh da skouer. Gouvit ar-uzel a arc'hant a va ar ganevien brudet, gant gwerzhañ o CD-où (evit ar ganevien n'int ket brudet e kavan queloù prenañ o CD kentoc'h eget mont war ar rouedad). Ne welan ket piv a vez direnket pa vez pellgarget meuzennoù pe traoù a servt-se.

Chloe, 14 vloaz

Ne gomprenan ket e vez difennet pellgargañ sonerezh hag e vez laosket an holl da bellgargañ meuzennoù evit e-mule !

Glenn, 15 vloaz

SOUEZHET MARV . 8



Me, gouzout a ran penaos...



... lakaat ma zud da bremañ din...



... ar pezh 'm eus c'hoant...



Hiziv an deiz, n'eus nemet feulster etre an dud...



Ha me, gouzout a rez...



... em eus kavet ur bistolenn !



Mod-se e c'hellin lakaat pep hini da asantih gant ar pezh a laran.



AZE VIMP TRECH !



Gouzout a rez, Jimmy, gant Pamela emañ bremañ !



'Rez ket bil, arabat dit respont dezhañ. Kavout a ri unan all ha setu tout...



KET ! War c'hoazh e lazhin anezhañ !



Sot out pe betra ? C'hoant 'p eus mont d'an toull-bach ?



Echuiñ da vuhez da-unan. Ro din ar bistolenn ha disofj anezhañ !



AR BED A YA FALL !

GLARGL


Kinniget gant skolaer-kaer-klass Dorian Kemper 2005 hag o c'hallennerez Florry CHAUFFIN

CHOARIOUSUPERKOULDREISTMEGABEUZ

UR C'HASTELL LEON A SIFROU

Pep sifr a ranko kavout e blas er gael-mañ.


10-15-18-24-25-31-32-33-40-43-
48-53-63-73-76-84-86-94-96-99-200-
457-704-906-1016-1095-1465-1908-
2131-2137-2772-4751-5327-5384-
6458-7935-8420-24889-28531-77743-
78073-78938-469283-526042-577937-
724903-1587298-3874608



AR C'HUB MELEN

Savet eo bet ar c'hub-mañ gant koad liv ruz. Koulskoude eo bet livet ar c'hostezioù gant liv melen. Ur wech troc'het gant un eskenn koad hervez al linenoù du :

- Pet diñs bihan a vefe en holl ?
- Pet diñs bihan a vo e ruz neme-ken ?
- Pet anezho a vo gant 3 fas liv melen ?
- Pet a vo gant div fas liv melen ?
- Pet a vo gant ur fas melen nemetken ?



AL LOGOGRIF

1	2	3	4	5	6
3	2	4	5	6	
4	2	5	6		
1	2	3			
3	6				
3					

Ur stal evit ar spered

Krouet en deus "la traviata"

N'eus ket da choaz

Muzul kozh

Mat da alumenn

Evel ur forc'h


Leugnit ar gael o lakaat lizherennoù e plas ar sifroù (Dalc'hmat ar memes lizherenn evit sifr-mañ-sifr, anat.)

CHARADENN

1. N'en em glev ket mat ar c'hentañ gant ar c'hi.
2. Ur sifr sakret eo an eil.
3. Ul lodenn eus ar sevnadur eo an trede.

PIV ON ?

AN ALUMETEZENNOU DAONET



Penaos sevel 4 dric'horn heñvel gant 6 alumetezenn ?


RANNAN HA KEMPOUEZAN

Penaos rannañ ar c'harrez-mañ etre 4 lodenn gant 3 eeunenn nemetken, a-benn kaout 5 sifr disheñvel e pep lodenn.


4	2	5	4	5
			3	
3	1		4	2
	5			1
		1		
	2			5
1				
	3	4	3	2

AN DINS

Sell ouzh an diñs-mañ hag a zo staliet war ur follenn baper rannet dre 6 lodenn eus A da F. Ijin e ruilhfe an diñs war zu ar B, da heul war C, D E, F, evit en em gavout en-dro war A.



Peseurt sifr a vo gwelet war tri zu an diñs, bre-mañ ?




Sikour : 2 du kontrol eus un diñs a ra 7 dre ret

AR C'HARREZ BURZHUDUS

E-barrzh ar c'harrez-mañ e kavi atav ar memes sammad pe e vefe a-blaen pe a-sonn ar sifroù. An div diagonalenn e-kreiz a roio ar chifr-se ivez, amañ 65.

11			20	3
4	12			16
		13	21	
	18	1		22
23		19		15



BUNEZ SIRVIDIK KLOE MARKOVITCH

Diveleun her. Plejw e bragan gant istor va buleg !
Kae eo ma am-bellad mat an holl a ra kle neñha...

O gannet, kelen ma 13 abeg
evad. Ma song din begat
ur eblec'h ampa ha digor.
Kizidit kenat on e gannet.
Kizidit e ra din an brenn-
haer, an venghoush...


PUTEN AR C'HAST!
N'EO KET VA ZRO D'OBER
HIZIV, KAOC'H KAZH!

Divez, erveet e van gant
brenn-haer ha "benghoush".



GWRIAT

Ezhomm zo gant Moereb Sidoni tri zamm danvez : 80X80 cm, 80X65 cm ha 90X65 cm. En ur stal e Brest e kav daou damm bras da vezañ didroc'het. 8 euro/m2 eo priz pep hini, neuze e tibab prenañ an hini marc'hamatañ. Ro sikour dezhi, rak c'hoant he deus da c'houzout ha bras a-walc'h e vo a-benn didroc'hañ an tri zamm danvez.



Dit eo da jediñ ment ha priz pep tamm danvez :

Danvez A
Gorread :
Priz :

Danvez B
Gorread :
Priz :

Klask lec'hiañ an tri zamm e pep tamm danvez.

AL LETI

El leti-mañ, skeudennaouet gant ar gael e-kichen, e kaver 5 seurt kambr niverennet eus 1 da 5 hervez an niver a gweleoù a gaver e-barzh. Ha kavout a ri ar c'hambroù m'emañ lojet Tom ha Liza e-barzh ?

Roet e vez dit da c'houzout :

- N'eo ket stok ho kambr d'ar sifr 3 (na eus an tu kleiz, na eus an tu dehou, nag a-us, na dindan)
- E-kichen emañ ho kambr (pe a-gleiz pe a-zehou) eus ur sifr 4 pe eus ar sifr 1, met ket eus an daou sifr war an dro.
- stok eo ho kambr (pe a-gleiz pe a-zehou, pe a-us pe dindan) ouzh ur sifr 1 (d'an nebeutañ) pe ouzh ar sifr 5.
- Uheloc'h eo hini Lisa eget hini Tom.

3	2	1	1	4	3	3	5
5	3	4	1	4	3	3	4
1	2	5	4	1	4	1	3
3	2	1	4	1	3	5	4
5	2	2	1	4	3	3	2
4	5	1	4	2	4	5	5
2	3	2	4	3	5	2	3
4	2	1	2	4	3	1	3
4	4	4	5	1	3	1	3

AR GAEL GERTIQU-MEKET DIAE'S BOMINADI

KUNJENNIN


M H O A G R P P E U S C P E L G N G S G
C H J O E A I N T D G A Z E S O N E T L
K A I Z N T N O A V L A M U I H E U R E
B L A O A C N N E D E U O F A L R O O U
L L A O O F O E R E R H N A D I U A N K
B O U V U N N E Z E K A T O G A O L K U
N E R U E J E D N N G L P N R H D C O U
R K I G G N L T E O N E O E T C U R A D
B A B R N A A E D O K E K U I N O U E A
K A N G M E R A L A M N Z M K K L O K S
R L B P A E Z E L N O A V E A E T T L T
E G O O R S V E M L O C H O R E Z L U A
N N A I U I T G K M B K U E I T L T E O
E S P G L Z K E R I A Z N L I E S V B T
R E U G N T E G R A P R E A G N T A G E
M G E S U O T G E I H G B O L A R W L R
C N L T R I C H A T A L R L O P I T O A
N A B N E B E K L M E T N A R Z D I O T
D E K V H I T A N T S I E E R F N A L W
A M P R E V A N M I B A N N A N H E R E

- ALMAON
- AMOED
- ANEVAL
- AMPREVAN
- BABOUZEG
- BAJA
- BEULKE
- BLAZER
- BLEUP
- BRAMMER
- CHATAL
- DIOT
- DOGAN
- FOERER
- GAGN
- GASTER
- GENAOUEG
- GLEP
- GLEUK
- GWIZ
- HAILHON
- ISTROGELL
- KAC'HER
- KAOUZ
- KEBEN
- KRENER
- LAFOUEDENN
- LAKEPOD
- LAMPON
- LANFRE
- LANKON
- LAOUEG
- LASTREZENN
- LOCHORE
- LONKER
- LOPITO
- LORGNEZ
- LOUDOURENN
- LOUKEZ
- MIC'HIEG
- PIKEZ
- PITAOUER
- STAOATER
- STROWK
- TAKEZENN
- TEILEG
- TOURC'H
- TOUSEG
- VILGENN

AR FRAZENN GUZH

RESPONTOU AR CHOARIQU PAZE DRELTEN NIV 3^e

P.12 - PLAKENNOU MARILH : 36KR7 -
AL LOGOGRAF : (1,R), (2,I), (3,D),
(4,E), (5,O), (6,Z) - CHARADENN :
MELC'HWEDENN (Mel-c'hwei(c'h)-
den) - P.13 : WAR AR PIKOU : 11
stumm - AR C'HELCH... : O sammañ
ar sifroù tro dro da bep steredenn e
kaver ar sifr 10 : 3 eo an hini a vank
- P.14 : TARZHUS : 67 bombezenn.



AR GOULENN DROCH-MIK??

Kazh piv zo un danser brudet e bro Ukrenia ?

(Kazetshok)
Respont : Kazh Azhok

Un istor iskis.

Erruet e oan en ur porzhig bihan a-dreñv ar c'hastell. Morse n'em boa gwelet ar porzh-mañ en a-raok. Tu a oa kompren ac'honan, ivez. Ken bras e oa tachenn ma zad, ken n'on ket sur e anavez-eñ hall sadioù e gastell, memes. Ober a ris an dro. Tri c'hard eur am boa lakaet evit en em gavout dirak dor ar porrastell. Aze e oa ur bannell : "Deuit tre e kastell Verditis. Eno ez eus tu da gaout frankiz. Sinet : aotrou Ar Glier."

Ur wech erruet e-kreiz an dachenn e sellis tro-dro din. Pell a-walc'h eus ar c'hastell e oan c'hoazh. O kuzhat e oa an heol. N'em boa ket taolet evezh. Ha me o vant pelloc'h.

Ar frazen-se... Ijinet e oa bet gant ma zad-kozh, hervez doare... Roue e oa-eñ amañ a-raok ma zad...

Digeriñ a ran an nor vras ha kercent en em gav ur gward dirazon. Gant e vouezh kreñv e stag da gomz ouzhin, o c'houlenn piv e oan ha Petra raen aze. D'am soñj e oa-eñ o kousket p'am eus digoret an nor. Setu perak n'en deus ket anavezet ac'honan diouzhtu.

- Periodek ar Glier eo ma anv. Mab Perian ar Glier, roue Verditis, on-me, a respontan dezhañ gant ur mousc'hoarzh bras war ma genou.

Sellout a ra ouzhin gant daoulagad digor-bras. Seblantout a ra bezañ dihonet bremañ.

- O... Digarezit ac'honan, aotrou, a lavaraseñ gant ur vouezh bihan hag ankeniet. Deuit-tre...

- Mersi bras deoc'h, a respontis en ur ganderc'hel da c'hoarzhin.

Goude bezañ erruet e jardin ar c'hastell e kemeran hent ar sal vras e-lec'h m'eo kustum ma zad da vezañ a-hed an deiz. Met a-raok erruout er sal an aterset gant ma c'hoar Sarahlda. Pemzek vloaz

eo-hi, blev hir ha du dezhi. Ne vez ket gwelet anezhi kalc' er mare-mañ. Chom a ra en he c'hamb er evit ober den ne oar Petra. Lavarout a ra tad eo kouezhet barrad ar grennoad warni. Pa ne vez ket en he c'hamb ne ra nemet huchel warnon, atav, a-dreñv ma c'heñ, o lavar din n'eo ket morse mat ar pezh a ran... Emichañs ne vin ket evelti pa c'hoarvezo ganin ar barrad ar grennoad...

- Ha gouzout a rez pet eur eo ? a c'houlenn ar wech-mañ. Seizh eur noz. A-hed an deiz on bet o klask war da lerc'h. E pelec'h e oas ?

- Aet e oan da bourmen, a respontan dezhi, sioul. Perak e rankezh huchel evelse ?

- Perak ? Perak e oan o klask war da lerc'h ? Peogwir eo da zeiz-ha-bloaz warc'hoazh ha tad en deus c'hoant gwelet ac'hanout.

- Hag e pelec'h emañ ?

- Er sal vras.

Buanoc'h ez an, evit adpakañ an amzer am eus kollet gant Sarahlda. Disonijet em boa ma deiz-ha-bloaz, gwir.

Digeriñ a ran a ran dor ar sal ha gwelet a ran ma zad war e gador aour. En em staliañ a ran dirazañ, e penn an daol, ha mut e choman, da c'hortoz ma komzfe. C'hoant en dije pediñ holl rouaned Breizh da zont d'am deiz-ha-bloaz. Ur fest vras e vefe. Gant bannerien, fentigellerien ha kanerezed brudet. Dibabet en doa gwel-lañ keginer Breizh evit ozañ ar meuzioù ha gourc'hemenniñ ar boued. Ur goul bras e vefe gouel ma nav vloaz !

Nav eur eo. N'on ket kousket c'hoazh. Leun eo ma spered a skeudennoù brav. En ma fenn e ijinan ar fest, ha skeudenn ar strolladoù sonerezh a zeu din. Met ne vez ket nemet ar skeudennoù. Ar son, ivez, a glevan. An taboulin oc'h ober

" b o u m ,
b o u m ,
b o u m "

Digeriñ a ran ma daoulagad : n'em boa ket graet nemet ijinañ : trouz an taboulin a glevan evit gwir. Mont a ran da gemer ur goulovenn-goar en armel ha lakaat lan enni. Diskenn a ran gant an diri evit mont betek ar sal a zo just dindan ma c'hamb. Un toull-bac'h e oa gwech all, ha morse n'on bet e-barzh na den all kennebeut rak lavaret e vez eo bet sorset gant ene ar prizoniad diwezhañ a zo bet bac'het ennañ. Diskenn a ran memestra ha me e-barzh.

C'hwec'h ar brein a zo amañ. Bale a ran war eskern. Ne welan tost netra, ken du ma 'z eo. A-greiz an deiz-ijinet e teuan a-benn, memestra, da welet ur sklerijennig o wilc'hata e foñs ar pezh. War an tu-se ez an. Merzout a ran ez eus un den e-kichen ar goulou. O skeiñ war ur seurt karroñ bras emañ-eñ. " boom, boom, boom ". A-greiz tout e teu sklerijenn er-maez eus ar c'harron, ken ma kouezhan war ma c'heñ gant ar souezh, serret ma doulagad ganin. Pa zigoran anezho en-dro e welan, e plas ar c'harron, ur voullenn c'hris hag ur paotr bras, war-dro daou vetrad dezhañ, o tont war ma zu. Komz a ra ouzhin e-ser ma sikour da vont en ma sav.

- Demat, Aotrou... E peseurt bloavezh emamp, larit din 'ta...

Ne respontan ket dezhañ, kement a oan am eus.

- Arabat deoc'h kaout aon. N'on ket drok.

- Piv oc'h, a c'houlennan, d'am zro.

- Simon Penneg. Ha neuze, peseurt bloavezh ?



Renan CHAUVET
15 vloaz



- e 1096 emamp.
- O va Doue... Re bell on bet !
- Re bell ?
- En amzer, alato !
- En amzer ?
- O ya, gwir eo, ne ouezez netra diwar ma fenn...

- Netra, nann. Eus pelec'h emaoch o tont ?

- Eus ar bloavezh 3096... Displegañ a ran deoc'h. Nevez 'zo em eus ijinet ur ribourzherez evit dont en-dro war ma c'hiz, en amzer dremenet. Hiziv e oan oc'h amproviñ anezhi. Laket em boa en ma soñj kilañ eus 2 eurvezh nemetken, amzer din pleustriñ war ma jedadennoù met en em gavet an daou vived a-raok. Kompren a rit ?

- Tamm pe damm, ya.

- Penaos oc'h anvet ?

- Periadok ar Glier, mab Porian ar Glier, roue Verditis.

- Ar Glier, ho peus lavaret ?

- Ya, ha perak e vefe iskis ?

- Anavezout a ran ur Glier bennak met morse n'ez eus bet kaoz gantañ eus ul lignez rouantel bennak... Ha c'hoant 'peus dont ganin en dazont evit kejañ gantañ ?

Ken fri-furz ma oan em eus respontet "ya". C'hoant em boa gwelet liv an dazont. Pignet on gantañ en e voullenn vras, o sellet pizh tro-dro din. Goulovennoù a liv disheñvel a oa e pelec'h, kuzhet dindan n'ouzon ket peseurt materi bennak. Lakaat a reas Simon un alc'hovez en un toullig ha pouezañ war nozelennoù. Ha "Boom".

Sellet a ran tro-dro din. Diskenn a ran diouz ar voullenn. Teñval eo er-maez. Ne welan takenn. Ne gomprenan seurt. Ha Simon, kentoc'h eget respont din, a ra din ur goulou hezoug, o c'houlenn ganin chom en ma flas e-pad un hanter eur a-

KELAOUENN

raok mont da glask ur straed. Hini ar "Général de Gaulle". D'ar poent merket en em lakaan en hent hag e kavan Simon eno gant un den all. Emgav en doa roet Simon din e korn ur straed teñval. Hep distagañ ur ger e voutas ac'honan e toull-antr e savadur kozh, savet a vrik-holl. Ha me da vont d'e heul dra ar skallerioù hanter vrein. Ur wech e pevare estaj e skoas tri zaol ouzh un nor hag ez eas e-barzh a-raok ma vefe bet pedet.

E teñvalijenn ar pezh ne welis nemet ur c'hazh du, dastumet e gorf en ur voullenn ouzh troad an daol ront...Ur c'hrogad paz dous a lakaas ac'honan da lam-mikat. D'ar poent -se eo e verzis anezhañ, en e sav e-kichen ar prenestr, paket en ur sae-kamb seiz bras. Ar memes liv gwenn en doa atav, ar memes daoulagad c'hlas leun a virvill.

-N'eo ket posupl, a laris war un ton klemm.

Ar wech kentañ e oa din gwelet ma zad-kozh abaoe ma oa marv, unnek miz a-raok.

- Azez, laras Simon din, en ur lakaat un dorn war ma skoaz. 'Maomp o vont da zisplegañ deoc'h.

- Met ma zad-kozh eo ! Penaos ho peus graet ?

- Da dad-kozh ? N'eo ket. X-Pawa ar Glier an hini eo. Un amezeg din.

- Tennañ a ra d'am zad-kozh, ur spont !

- Anat, un diskennad deoc'h eo. Tennañ a ra deoc'h ivez.

- Met n'on ket ken kozh...

- Dont a reoc'h da vezañ un deiz bennak. Ale, hop, poent eo din kas ac'hanoc'h en hoc'h amzer en-dro !

Pignet on gantañ en e voullenn... D'an nebeutañ e ouzon bremañ em ba bugale, un deiz bennak.

Ha "Boom !" !

Mont a ra Irial da gant kentelioù gant he zad-kozh. Koulskoude, war an hent e kei gant a bep-seurt tud iskis... ur plac'hig gwisket e ruz hag ur bleiz, da skouer.



BEURK EU !



DROL-TRE, PENN BEULKE!
GLEB-T'EL ON BREMAÑ!

A C'HA C'HA
PAKET OUT BET
PAKET OUT BET
IRIAL, AR
FLÂTREZ!

DISKINN AC'HALESE,
PE 'MOD ALL, E PIGNAN, HAG E
KOUSTO KER DIT, FRI MEÇ'HEK!



GWELLOCH 'VEFE DIT
DISTREIN D'AR GÉR
FULORET-RUZ EO MAMMA
WAR DA LERC'H GORTOZ
A RA AC'HANOUT EVIT MONT
DA BREMAÑ DEFO'ACHOU!



PETRA A CHOARVEZ IZIV ? OBER A RA
DIN 'GIZ MA VEFEN E-KREIZ UR MANDEN
DRESE? POEVT DIN DALIN?



AN 'TROUZ-MAÑ, N'EO KET REZZH
D'AN DIN MONT DA VELET!




DAL ! HA FAZIAN
ISTOR 'M BIJE
GRAET P... MA
N'EO KET STRIKT!

ADLOC'HAÑ
A REOMP
MIGNONED !



NE FELL KET
DIN BEZAN
DIRENKET KEN!!



Abaoe 1971 eo deuet Gabriel Le Vourc'h da vezañ mailh evit sevel ti-koad hoc'h huñvreoù. Mestroni ha skiant-prenet, setu aze an daou berzh a implij evit liammañ doare gwechall hag amzer a-vremañ.

Dibab un ti-koad a dalvez bezañ servijet gant un den a-vicher, barrek ha dedennet gant e labour.

Ma fell deoc'h kaout ar pep gwellañ war dachenn ar sevel-tiez, n'eus nemet goulenn.

**Tiez Koad graet e Plougerne
Z.A. an Hellez 29880 PLOUGERNE
Pgz : 02 98 04 62 19 Plr : 02 98 04 69 56**

ar Porzhier

Tarek -Chouin



★ Marshall Bob ★



K'ONTAN A BAN WARNOC'H, NEUZE, MARSHALL, NE VO SOTOM EBET, SUR FO, HAN ?

KUDEMN EBET, MISS DOTTY, KEMERIT TOUT NOC'H AKER, O C'HORTOZ AC'HANOC'H EMARON, AZE, AZEET TRANKIL.



AHHH, AR MERCH'D HAG O C'HAMAMBRE... DALI N'ELUS NETRA PAR D'UN TAMM BUTUN-KAROT EVIT LAKART AN ANZER DA DREAN.



DREIST-HOLL PA SEBLANT DIN BEZAN LOC'HEB EVIT UN ABADENN VAT...

POUTCH !



"POUTCH" !?!! PENAOS TA "POUTCH" !?!!

PERAK NE RA KET "DING" EVEL AR DE ALL ???

AR POD-TUFAN-SE N'EO KET UNAN MAT !!



GORTOZ MA KROGIN EN-DRO... HUIF ! FARSUS A-WALC'H EO !! HA TALVOUDUS WAR UN DRO! N'ELUS KET DA LAEBET, BEZ E C'HELLER TUFAN BINAN DINEC'H-KAER !

POUTCH POUTCH ! POUTCH



HAG AMAN EM ELUS UNAN O TONT ELUS ATLANTA HAG A'Z AIO DEOC'H EVEL DRE VURZHJD, MISS DOTTY !

TRAWALC'H EO SANKAN ANEZHAN EN UN TAC'L KRENN EVIT MA TALC'HE.



* POAN-GALON A VEZ C'HORZH GANT AR MARSHALL ? ** TAMM EBET, POAN EN DEUS D'EN EM OBER OULZ AR C'HZ, SETU TOUT.

ENEZENN AN TASMANT

J.-C. BALAN

En em gavet eo Rhesus ha Dulc war un enezenn satanazet. Chomet sachet eo ar c'harn-nij. Pernañ o klask Rhesus dresañ anezhañ e kej gant tasmant LONG BEN ur morlaer legue me zo unan...



TEC'HIT KUIT DIOUZH AM ENEZENN



TEC'HIT AR BUANAN, AR GWELLAN



PE E C'HOARVEZO DROUG DEOC'H.



PETRA A ZO PEG EN DA REVR EVIT GALOUPAT KEN BUAN ?



AN TASMANT, GWELET EM ELUS ANEZHAN.



DAV DEOMP MONT KUIT BUAN PE E C'HOARVEZO DROUG DEOMP.



ME 'FELL DIN GWELET AN DRA-SE GANT MA DAOULAGAD DIN MA-LINAN!



A-WECHOÙ EN EM C'HOULENNA HA KLEVET A RA AC'HANON...



HA NEUZE, E PELEC'H EMAN, DA DASMANT ?

NE GOMPRENAN KET. AZE E OA, PEMP MINUTENN 'ZO.



ME 'SONJ DIN EO AN AON KENTOC'H A LAK AC'HANOUT DA ALTERIN.

GOUZOUT A RAN RE VAT AR PEZH 'M EUS GWELET.



HA SELL AMAÑ 'TA. SETU UR BROUENN !



GWIR EO NEUZE. HA NE SEBLANT KET BEZAN PLIJET GANEOMP.



DISPAR ! DRESET EO AR C'HLEFUSKER !



PENAO'S 'TA ?

DRES EVEL UNAN NEVEZ. PREST DA LOC'HAÑ.



LIN DRA BENNAK ISKIS A ZO EN ISTOR-MAN.



ESTREGET UR GOUMOLENN DI-DREUZUS, UN ENEZENN DIANAV, HAG UN TASMANT TAGNOUS... N'EUS NETRA... NE WELAN NETRA ISKIS EN AFER.



ME, AR PEZH A GAVAN ISKIS EO GWELET TASMANT UR MORLAER EUS AN ISVET KANTVED BEZAN BARREK WAR AN DRESAN KIRRI-NIJ.



MARTEZE EO BET C'HOARVEZET GANTAN KEMER KENTELIOU DRE LIZHER...



BISKOAZH C'HOAZH !! SELL AMAÑ !!



FORZH PETRA ! SELL KENTOC'H OZH AR ROUDOU, DU-SE, WAR AN TRAEZH



DEOMP D'O HEUL

ISKIS, DIOUETIN A RAEN AR PEZH 'PIJE LARET.



HA PETRA EMAOUT E SONJ KAOUT E PENN PELLAN AR ROUDOU-SE ?



KEV AN TASMANT, GANT UN TAMMIG CHANS...



NE DALVEZ KET AR GER 'CHANS' D'AR MEMESTRA EVIDOMP HON-DAOU.



SELL ! DU-SE, E GEV, SUR-MAT !



WAR ZISKENN EZ A, EVIT UR WECH, D'AN NEBEUTAN



DIWALL !! ARVARUS E C'HELL BEZAN

PETRA SONJ DIT, RISKL EBET...



PAF!



AR GWIR GANIT, BUANOC'H EO BET AN DISKENN EGET AR C'HRAPAT.

NETRA TORRET ?

EO, AR SKEUDENN AM EUS OUZHIN.

AMAN EMAN HON TASMANT O LOJAN, NEUZE ...



SETU UN TASMANT A OAR KAS E VOUEJED D'AN TRAON.



DEOMP DA GUZHAT, NE DLEE KET DEZHAN BEZAN GWALL BELL.

LIN DRAIG BENNAK A C'HELLFEMP DEBRIN A-RAOK ?

GALOUPAT, PAKAN TAOLIOU HA BOSOU HEP GELLOUT DEBRIN AN DISTERAN...

PEOC'H ! KLEVOUT A RAN ANEZHAN O TONT...



AN TAOL-MAN, N'ON KET PREST DA WELET ANEZH O TONT EN-DRO !

TRA KEN GWELET PENAOS EO TEC'HEK KUIT AR FOER-EN-E-LOEROU YAOUANK-SE...

KUITAET EN DEUS AN ENEZENN WAR-NEUJIN, SUR.

TOURELL AR FELTREZ

Aurélien H.



Er fin ! Un amprev-
adenn hevez

Pfuu ...

YAAAAA !

BZZZZZ

VOUWAP

Erruet on d'al live 25,
n'az peus chais ebet ganin !

VOUWAP
SCHTINK

? ...

VOUWAP
SCHLAK

Bezañ JEDI e-barzh on dourell...
N'az on dazont !

BZZZZZ

GRIP AL LABOUSED

YANN A. MORVAN



embannet gant / Editions :
KEIT VIMP BEV
22, grand rue
29520 LAZ
Pgz : 02.98.26.87.12
Plr : 02.98.26.80.35
keit-vimp-bev@wanadoo.fr
Moulet gant / Imprimerie :
OUESTELIO
505 st. Jurien
de la Graviere
29200 BREST
cedex 02
Rener ar gazetenn /
Directeur de la publication :
Yann-Fanch JACQ
Kenurzhiañ / Maketenn
Tresañ ar c'hoarioù :
Owen POHO
owen.kvb@wanadoo.fr
Tresañ ar golo :
R. LE DORVEN
Skouezellorien :
Gwen Delalande
Paskal ar Marc'heg
koumanantin :
58 euro ar bloaz
4,2 euro ar miz
(dre dreuzvanañ)

Niv. CPPAP : 1005 G 840 75

Istorioù farsus Yann BIJER

An esperañs aet da ludu.

Intañv ha pinvidik-mor e oa-eñ. Intañvez ha paour e oa hi, met pemp bloaz warn-ugent yaouankoc'h egetañ. P' en doa graet e c'houlenn outi, he doa respontet "ya!", hag a galon vat. Bez' e rank pep hini bevañ, hañ!

An den, siwazh dezhañ, a bakas ur marv trumm, tra ma oa hi choazh e brud he femp bloaz ha tregont. Ur bez eus ar c'haerañ tout a lakaas-hi sevel evitañ, e marbr Itali, ha skrivet war ar marbr, gant lizherennoù aour mar plij.

"Keneil muiañ-karet."

"Repoz bremañ e peoc'h ken ac'hann e teuo fin ar bed."

"Da zousig, Sidoni."

Ur wech lakaet ganti, war maen ar bez, bravañ boked bleuniou kala-gañv bet gwelet er vro bis-koazh, e yeas ar vaouez da di an noter, da douc'hañ fortun an hini marv, peogwir ne oa chomet heritour all ebet war e lerc'h. Na pebezh souez-hadenn a gouezhas war he chouq, pa lavaras an

noter dezhi en doa an hini marv roet e fortun d'ar veleien. Ne oa tra ebet eviti. En he mallozh ruz e yeas, hag hi ha mont en-dro da welout an touller beziou ha piker-maen anezhañ, hag hi ha lavarout, rust an tamm anezhi.

"Ac'hanta, Jañ-Mari, te' rank mont diouzhtu d'ar vered en-dro a-benn reizhañ ar pezh am eus lakaet ac'hannout da skrivañ war ar maen-marbr."
"Ata, Sidoni! — Keneil muiañ-karet — n'eo mat mui?"

"Tamm ebet, te' skribo e anv bihan : Job."

"Ata! hag ar sinadur : — Da zousig — n'eo ket mat mui?"

"Tamm ebet, te' skribo : Sidoni."

"Hag ar peurrest, hag a ya betek fin ar bed?"

"Ne c'hortozo ket keit-se, mil boul'churun ! M' henn asur dit Jañ-Mari. Te' skribo e-giz-mañ."

"Repoz bremañ e peoc'h ken ac'hann e teuin-me ivez." Hag arabat dit implijout lizherennoù aour, seizh mil luehdenn gamm!



51

SKUIZH DIVI (2)

